


## KANTIKOU EN HENOR

## DA INTROUN VARIA MENEHOM

e parrez Plodier.

DISKAN.

Introun Varia Menehom,  
 Euz hor sicour ni'r heuz ezom ;  
 Pedit evit ho pugale  
 Jesus, ho mab, hor guir Doue.

1

Evel eun tour var an huel  
 Zifen ar vro pa vez brezel  
 Ho chapel, Mari, zo savet  
 Vi hon dioual diouz droue hepret

2

Ar soudard, kent mont d'ar vrezel  
 D'ho saludi deu d'ho chapel;  
 Na pa vez eat pell diouz he vro,  
 Ouzoc'h e c'houlén an distro.

3

O pet sonch, Guero'hez benniget,  
 Var ar melez o voac'h hanvet  
 Vit beza d'an dud malheuz  
 Eur vam sur d'ho c'hass de Jesus.

4

Grit eta divar ar menez  
 Varnomp oll eur zell a druez ;  
 Bezit hor mam evit ato  
 Brema hag en heur ar maro !

Respont ar Verc'hez.

Va bugale, sellit huel,  
 Var ar menez ous va japel ;  
 Euz va sicour m'oc'h euz ezom  
 Deuit da japel Menehom.